

# KOANTIK-HOLL

304

PE

## Ar relijion gristen o trec'hi e Breiz-Izel (1).

Drouiz (2), gweled a rann da dolmen ;  
Da Zone Huelvar n'eo Doue ken...  
Er c'hoajou derou; da deplou teval,  
Gand da falz aour ne vez muin o tridal!!!

War don : *Santez Mari*, pe eunn ton all.

### I.

Peger brao ha peger sioul hen noz Koat-ar-Rannou;  
Al laboused zo kousket er gwez war ar brankou;  
Ha ne glevet mui zoken, klemmou ann durzunel,  
Na krozmol spountuz ar mor e dro da Vreiz-Izel.

Ann holl dreo a zo breman e peoc'h war ann douar,  
Menez-Hom a zo du-hont, vel eunn teuz dilavar,  
Hag a sell brao, hep truez, pense ar c'hantvejou,  
Rag enn amzer dremenet hen nez a wel goulou.

Bolz ann env a zo brouded gant tarzou ar stered  
E pad ma-z-ann gand ann hent, hastuz braz da weled  
Kuruni, warc'hoaz vintin, Rouanez Breiz Izel,  
War-n-out te douar ar feiz, bro gaer ann dud santel.

Ho! Patrounez Remengol, gwerc'hez ar burzudou,  
Gand Doue oc'h bet galved evit mamm d'hon Aotrou;  
Hor sent koz, hor rouanez hag ivez hor barzed,  
Ho meulo hag ho pedo dre bevar c'hourn ar bed.

Gwenn-C'hlan, ro d'inda delen ra savinn eur werz c'hoaz  
Da Vamm ann Aotrou Doue a varyaz war ar groaz,  
Da Vamm ann dud reuzendig hag ann dud ankenied,  
Da Vamm ann holl verzerien evid ar feiz marved...

(1) Drouiz, Drouized, hanñ roed gwechal, e Breiz-Izell, da ve-  
lein ann doueoù faoz, pere a ioa: Huelvar, Teutatez, Hled ha kalz  
a re all.

Koantik-Holl a ioa marc'h hena Dremm-Derou, beleg braz Teuta-  
tez e Koat-ar-Rannou, el leac'h haaved neuze Ru-meu-goulou hag  
e pelec'h e ma breman Hliz ann Troua-Varia Remengol.

(2) Relijion ann Drouized paen.

Eun eur skulia holl ho gwad da rusia ann dolmen  
Ho daoulagad a zavend d'ann env gand ho feden ;  
C'houi hoc'heinnerze gwerc'hez, hag ho rente krenv holl,  
Ha gantho oc'h bet hanved *Itroun ar Remed-Holl* !..

Taliezin ha Marzin. Barzed ann amzer goz,  
Roid d'in ho telennoù ha chetu ma mennoz :  
Lavared d'am c'henvroiz ar burzudou zo bet  
Gwec'hall war dro Remengol ha Koad ann-Drouized.

Salud did, loar arc'hantel, rouanez kaer ann noz ;  
Sav da benn war Menez Bre, sav a uz Koad ann-Noz ;  
Sav eta, sav huelloc'h, dalc'h da zavel bepred,  
Ha deuz da lavared d'inn ann traou zo c'hoarvezed

Da zaoulagad a welaz ma zadou koz e gvenn,  
O tiskar, o tiwada-tud beo war ann dolmen,  
War dolmen ruz Teutatez, hanvet *Men ruz goulou* :  
Ar gwad a vije eno evel dour er poullou.

Kear Is, gand he falechou, hag ive he dek dor,  
Ez teuz gweled o veuzi eun noz e kreiz ar mor ;  
Ahez, he amourouc'hen, ho abaden troc'hed,  
Er teuz kleved o iudal e kelc'h ann diaouled.

Ro d'in doare Kaourintin, Gwenole ha Grallon ;  
Ro d'in doare ar zarpand ha Sant Pol a Leon ;  
Lavar d'in hano ann dud lonket gand al loen ze,  
Ro d'in peden burzuduz ha baz ann den Doue.

Ha gweled ez teuz ive ar potr koz *Dremm-Derou*,  
Tad ann drouized, e Breiz, e tal *Men ruz goulou* ;  
*Torr-He-Benn* ez teuz gweled e kreiz stourin vraz Argoll,  
Ha gweled ez pe ive ar plac'h fur *Koantik-Holl* ?

E tour huel Remengol anter-noz a zonaz,  
Hag e weliz adare traou kaer evel bep bloaz ;  
Gweled a riz holl sent Breiz, ar belerinet koz,  
Eneou ar purgator ha re ar baradoz !..

Sant Gwenole ouz-in me a gomzaz evel-hen :  
• Te zo bugel d'ann Arvor hag a vizkoaz Kristen ;  
Kared ez out gand Doue ha Gwerc'hez Remengol,  
Te a gaso he hano meuled are ar bed holl ! !..

• Kleved e deuz da beden, deuz gan hen war he zour,  
Rak d'in e deuz lavared e teuo d'azzikour  
Da lavared da Vreiziz ann traou az po gweled  
Gand da vignoun Gwenole en deuz aman bevet.

• Sell aze, barz evuruz, ann amzer dremenet,  
Sell war ann tu ma kari; n'eu deuz netra kuzet;  
Da zaoulagad ha ma re a wel ar memez tra,  
Dal breman telen Arvor a desk warn-n-hi kana.

• Var ann delen aour glan ze ar send hag ar barzed  
A gane evel ar Skour, da vignoun ker kared;  
Han'euz ket pelle c'hoaz Brizeux, kerkoutz ha Kermarker (1)  
Kemar, Karis, Milin, Troud a gane ive kaer.

• Ober evel ann eostik, kentoc'h evit kana,  
Starda kerden da delen ha poeza mad pep tra  
A renki c'hoaz da ober, paour keaz barz Koad-ann-Noz,  
Ne lavarinn netra ken, me ia d'ar baradoz!.. •

## II.

Deuit breman d'am c'hleved : hirio, hep ehana,  
War delen aour ann Arvor me a ia da gana;  
C'hoand am euz da zisplega ann amzer dremenet  
Ker kaer ha ker burzuduz vel ma meuz-han gwelet...

Bez a zo pemzek kant vloaz, Remengol ne oa ken  
Nemed eur c'hoad du teval, enn hegreiz eunn dolmen; (2)  
Peziou kerrek rouz barvek d'ann dol a rea ann dro,  
Vel ken liez a varner o varn tud d'ar maro.

E dro d'ar men ze ruziet, bemdez gant gwad tud keiz,  
E oa gwez derou ledan ker koz ha douar Breiz;  
Goloed e oa gant ho ha diouc'h ann heol kuzet,  
Hag ar pagan he hanvaz ar *Men ru goloed*.

Ha beleg braz Teutatez, Dremm Derou he hano,  
Gand eur c'hreg ha bugalez a ioa o c'houn eno,  
He verc'h hena ioa ker koant, ker tener he sello,  
Ma oe hanvel *Koantik-Holl* gand ann holl tro-war-zro.

E tu all e oa kear Is, kousked dindan ar mor,  
He mozeriou diskared hag ive he dek dor;  
Gwenole ha Kaourintin a welaz anezhe  
Pa oant deud da Vreiz-Izel da hada komz Doue!!!..

(1) De La Villemarqué.

(2) Eunn dolmen a ioa eur men braz ha plad, lakaed evel eunn  
trebe war dri men all, ha war hen-nez e vije diwaded ann dud da  
renta meuleudi d'ann doueou faoz.

Koantik-Holl, p-he doe kleved displeg ann aviel,  
A c'houlennaz badizand digand ann dud santel;  
Hag enn iliz Veur Ken per sant Kaour he badezaz. (1)  
Grallon ha mamm Gwenole evit-hi a douaz.

E touez soudardet Grallon e oa eur soudard mad,  
Eur polt stard, ter enn emgann, hep acoun da goll he wad;  
Hen-nez, e stourm vraz Argoll, enep ann brouized,  
A oe meurbed kalounek ha Tor-He Benn hanved.

Gwenole her badezaz e traoun Lanndevennek,  
E kichen ar mor spountuz hag e touez ar c'herrek;  
El leac'h se divezatoc'h e oe eunn abati  
Savet gant sant Gwenole var eeun da *Dibidi*.

Kousket mik e mant breman e gweled ho bezien,  
Deuz hor c'henta abati ne weleur netra ken  
Nemed eur mean ruil bennag, drez ha spenn o sevel,  
Eunn foullat koz mogeriou a gren gand ann avel.

A wechou e klevour c'hoaz, pa ve kre ann avel,  
Gwenole ha Kaourintin eno e n'em c'hervel;  
Mar gweleur neuze Ahez, krog enn he bleo bezin,  
Ar venec'h koz a sav holl hag a zeu da c'hoarzin.

Grallon en doa c'hoantaet, pa oa beuzet kear Is,  
Diskar men ru ar c'hollou ha sevel eunn iliz  
Da Zone ar gristenien hen dalc'haz e buez,  
Hag enn enor d'ar Werc'hez he zikouraz ivez.

Pa oe diskared he droun, Teutatez a winke,  
Hag ann drouized, er c'hoad evel chas a iude,  
Hogen e desped d'ezho, koulz ha da Deutatez,  
Eun he blas e oe saved eunn iliz d'ar Werc'hez.

Da lakaad ar mean kenta Gwenole ha Grallon  
A zeuz ho daou, eunn deiz gand ar prosesioun;  
Koantik Holl ha Torr He Benn eno a n'em welaz,  
Hag ann eil war egile he sellou a dolaz :

#### TORR-HE-BENN.

- Me ho salud, plac'h iaouank, kaer oc'h evel ann deiz,
- Ha rouanez e vijac'h ma vijenn roue Breiz;
- Ma Brasa joa er bed man, pa n'hellann ober ken,
- A ve rei d'ec'h ma c'haloun hag eunn hano kristen.

(1) Kaour pe Kaourintin, kenta eskop Kemper,

KOANTIK-HOLL.

M'ho trugarez brezelour me a zo badezet;  
Dougen a rann ann hano oc'h euz d'in kinniget;  
Ma c'haloun a meuz roed d'ann Doue *Eternel*  
Enn Iliz-Veur a Gemper n'en deuz ket c'hoaz gwell bell.

TORR-HE-BENN.

Ho Toue eo ma hini? Ho! eurusa kelo;  
Na m'eump nemed eunn ene. bepred me ho karo;  
Ha mar n'am c'harit hu ket kenavo levez;  
Rag evid ounn da dremen c'houero vo ar vuez.

KOANTIK-HOLL.

Furmed eo hor c'halounou evel se gand Doue.  
Ann den keaz war ann douar a renk karond eure,  
C'houi gar ar re a garann : Doue hag ar Werc hez.  
Ha kredi rann ho deuz c'hoand e rafoc'h d'in al lez.

TORR-HE-BENN

« Daoullnomp hon daou aman ; goulennomp sklerijen ;  
Arog ober mad pep tra eo red ober vel hien ;  
Goulennid digand Doue petra a lersod d'in ;  
Keit a pado ho peden evidoc'h e pedinn.

KOANTIK-HOLL.

» Torr-he-Benn, sav a lese. Doue en deuz komzed ;  
Ma c'haloun a vezo d'it, me az karo bepred ;  
Bezomp skouer ar iaouankiz ha skouer ar priedou  
Ha deskomp d'ezho ann hend da Ven-Ru ar goulou.

TORR-HE-BENN.

» Ra vezo e Breiz-Izel binniget ann hano  
A Goantik-Holl ar gaera a rozennoù ar vro ;  
Ra vo binniget ann deiz hor gwelaz ken euruz,  
Ra vezo hor c'halounou bepred karantezuz. »

Levez ar baradoz eunn ho a ziskennaz ;  
Lagad ann Aotrou Doue war n'heze a droaz ;  
Ele ha send ann envou o welet ker kaer tra,  
E c'houmaz holl estlamed o sonjal eunn ho joa !..

Ne ma ket war ann douar siouaz ! ar gwir joaiou,  
Eur berad dour ne d'int ken eunn eur mor a zaelou ;  
Torr-He-Benn hag he vestrez, n'euz ket pell ker seder  
A vezo ho c'halounou gwevet gand ar c'houervder.

Dremm-Derou Kounared braz, pa glevaz ar c'helou,  
He falz aour en deuz savet e trezeg ann envou :  
Teutatez a zo flastred hag he vere h badezet  
Hezaoulagad o wada vel-hen en deuz komzet :

• Teutstev, kousked oc'h hu ? Ho ! Doue divorce'hed !  
Sav da benn, astenn da vrec'h, ha sko eunn taol kaled  
War Dorr He Benn milliged ha ma merc'h Koant k-Holl,  
Koulz ha war *denned-bleizi* (1) ar roue Grallon fol ! •

Allaz ! paour keaz Dremm-Derou, doueou koat n'int man ;  
Diot kaer eo ann hini ho hano a eubann ;  
Ker diod all eo ar re a sello ann douar,  
Et leac'h selled ann envou, gwir droun roue ar gloar.

Pa z-eo bouzar Teutatez Dremm Derou a c'halvo,  
Gand he gourn boud askorn du, drouized ar Ranno ;  
Eun eur frota he dal rouz, pa oand holl deztumet,  
Vel Satan war ar c'hraevaz d'ezhe en deuz laret :

• Selaouit, bugalez Hed, tad koz da Deutatez,  
Ann Doue digaloun ze, bep van euz hon enkreuz ;  
Koantik Holl, ma merc'h henan, drouizez birvidik,  
A zo breman kristenez ha meurbed barboeldik. .

• Aiaou allaz ! Huelvar ? ez comp da simpla.... •  
Ann eon enn ho geno e oer red d'he klucha ;  
Hag ac'hane e savent, vel bleizi kounnaret,  
Eun eur lavared truel : • Ra vezo diwadet •

Nann, nann e me Dremm Derou, e n'em divadezi,  
Mar e deuz c'hoand da vev, a vezo red d'ezhi,  
agoue'h peun toued aman ne sello briviken  
Ouc'h ann drouizet nevez a ra ann dud kristen.

Vel eur stereden vihan, lirzin e kreiz ann noz  
Evalee Koantik Holl warlerc'h ann Drouiz koz ;  
Pa oend holl e dro d'ezhi, ho c'hontellou digor,  
Send hag ele a gane : • Dalc'h mad, dalc'h da enor •

• Chetu ma c'haloun aman o c'hortoz ho taoliou  
Bastit skei, ha skei bepred hag ez iun d'ann envou...  
Kentoc'h evid dinac ha Doue ar gristenien,  
Et leac'h mervel eur weach, kant gweach e varfenn. •

Barned e oe d'ar maro gand he zid da genta,  
Hag eur gurunen derou war he fenn a laka ;  
Astennet war ann dolmen, Dremm Derou kounnaret,  
A gemeraz he gontel... he vere'h zo diwadet...

(1) Tromperien.

KerKent e kren ann douar hag ar c'herreg a rann,  
Ar gurun a strak spontuz, al luc'hed hag ann tan  
A ra gweled ar c'han loar teval ha ruz vel gwad,  
Blejadennou al loaned a ra blejal ar c'head!..

Eunn eta zeuaz neuze, war eur goumoulen weun,  
A grec'h ann eny d'ann douar, gant han eur gurunen  
Da gurun merzerez merc'h hena eunn Drouiz;  
Pebez kentel evidomp, kemerit hi Breiziz!

Ann drouizet, pa weljond eunn arvest ker nevez,  
A n'em laka da redek evel ar gevred gwez;  
Malloz ann Aotrou Doue koutezet war brenn Derou  
A laka dindan he dreid tarruz ann ifernou

Torr He-Benn p'hen deuz klevet petra a c'hoarveze,  
He sabren noaz eun he zourr a erruaz ive;  
Koantik Holl, anter varo a toa war ann dolmen  
E desped d'he holl foaniou e savaz c'hoaz he fenn!..

• Ma mignoun ker, emezhi, mond a rann da vervel;  
Ne wel ket war ma maro mond a rann d'eur vro well;  
Gweled a ri Koantik Holl ebarz er baradoz,  
Eun ni a n'em garo unaned o repoz!.. •

Diwar he biz e tennaz eur bizou aour melen  
Hag he c'hroz aour a lemmaz ive deuz he c'here'hen;  
Da Dorr-He-Benn ho roaz hag e laraz neuze:  
• Da galoun a vo krenvoc'h o tougen ar re ze. •

• Karoud a ri da Zoue ha Gwerc'hez Remengol,  
Eunn dro bennag e sonji ez mestrez Koantik-Holl;  
Kared e deuz ac'hanod, da gared a raio...  
Kenavo, ma mignoun ker, kenavo, kenavo!!!.. •

Torr He-Benn a gemeraz he boan digand Doue,  
Stoued a reaz d'ann daoulin; a galoun e pede  
Pa zeuaz Sant Gwenole da lavared d'ezhan:  
• Sav, sav alese, ma mab, sebeliomp ar c'horf man, •

• Troc'h d'in pevar bar derou da ober eur c'hravaz  
Da lakaad ar c'horf maro, ac'han eo red hen kas;  
Ha breman bez kalonnek ha doug han war da vrec'h;  
Ne ket roed d'ann holl dud kaoud eunn hevelep bec'h!!!.. •

Torr He-Benn en deuz douget korf gwalek Koantik-Holl  
Beteg al leac'h a hanver abaoe Remengol. (1)  
Hag e plas ann aoter vraz Gwenole a doullaz,  
Ha Torr He-Benn, e douar, ar c'horfa ziskennaz.

1) Re me e goll.

He benn pleged er boultren, Torr-He Benn a lare :

» Te pehini a garenn . . . repoz vad d'az ene . . .

Ho! dindan lagad Doue ha Gwerc'hez Remengol,

Da gousk hir a ri gw-lloc'h, ne ket gwir Koantik Holl?..

» Ne vo ket pell e teuinn enn da gichen aman ;

Ia, dond a rinn da gousket er gwele douar man ;

Rozen dener ann Arvor etig ar baradoz,

Ennoud e sonjinn ato hag enn deiz hag enn noz...

» Eunn dro bennag Koantik-Holl, disken deuz ann envou,

Ha deuzgant da zae, gwen kan da zec'ha ma daclou;

Ped evid ounn ar Werc'hez, patronnez Remengol,

Kenavo er baradoz, kenavo, Koantik-Holl. . . »

Hag abaoe e weler, pa sav heol ann Dreinded,

Deiz pardoun braz Remengol, pardoun ar Vretouned,

A Goantik-Holl ar skeuden, enn he douar ar zontel,

A loa gaud he zad digar pa reaz d'ezhi niervell!..

### I.-M. AR IANN.

Testeni a garantez da I.-P.-M. AR SKOUR, barz Itroun-  
Varia Remengol. — 1863.



---

Gwengamp, e ti ar GOFFIK, Moüler ha levrer.